

Son evit eun eured

KAN :

161

419

Kanomp, greomp eun abadenn,
N'eo ket pec'hed beza laouen
P'en deuz ar belek unanet
Dirag an Iliz daou bried.

Dirag an Iliz ha Doue
Ho deuz gouestlet ho c'harante,
Int 'n em ouestlat evit ato
A galon beteg ar maro.

Kanomp, greomp eun abadenn!
Ne 'z ai ket c'hoaz d'an traon hor
[gouen:
Eur iouadenn d'an dud neve,
Dezo iec'hed hag hirr vue!

Kanomp laouen en yez hor bro,
Kaëra yez so hag a vezo!
C'houezit bombard ha biniou
Ma raïmp c'hoaz eun droïk pe ziou!

.....
.....

Er park roz-ki em euz gewlet
En ho zro drein moan ha kalet;
Me 'm euz gwelet kistin er c'hoad,
Gant ho c'hlounn difennet mat...

Mez gant an drein-ze difennet
Ar roz oa dudi ho gwelet,
Hag er c'hoad dindan he c'hlosenn
Oa reud ha iac'h ar gistinenn...

An dever ive da welet
A c'hall beza rust ha kalet,
Mez pa vez gret gant karantez
Zo joa d'e heul 'vit ar vuez!

Y. R. T.